

boremañ



BAG

DIWAN

BERZH

GOUELIOU

ETREKELTIEK

AN ORIENT

BROIOU

KELTIEK

**DISTRO-SKOL
EVIT AR BREZHONEG**

Kemper

Skol "Multilangues" e Kemper. Kentelioù brezhoneg, pevar live, gouezeleg ha kembraeg. Evit enskrivañ, pe kaout titour, pellgomzit d'an niverenn-mañ : 98 59 65 16.

Roazhon

Kentelioù-noz Skol An Emsav, bemdez (Lun d'ar Gwener noz) da 6e ha 8e noz ; brezhoneg ha kembraeg, pevar live, ha kentelioù istor Breizh (lakaat war ar stern er bloaz-mañ) evit an holl. Enskrivadurioù digant ar sekretouriezh 99 38 75 83 - bemdez etre 8e ha 6e g.k. - 8, straed Hoche - 35000 Roazhon.

Dibenn-sizhun studi d'an daoulamm e Redon (Ti Kendalc'h), d'ar 27 hag 28 a viz Du. Evit lakaat e anv : SAE 8 straed Hoche 35000 Roazhon. Holl liveoù (derraouiñ da live adregezh) - 14 eurvezh kelenn -

Redon

Kentelioù brezhoneg tri live gant "Gwezenn", La Marionette, 35600 Redon, pellgomz : 99 72 20 62.

Naoned

Kentelioù brezhoneg pevar live gant Skol an Noz. Titour hag enskrivañ digant Gweltaz ADEUX, pellgomz : 40 49 13 71.

Sant Maloù

Kentelioù-noz tri live gant Kelc'h Sevenadurel Sant Maloù, titour hag enskrivadur : 99 81 87 04, 6 pl. Bouvet, 35400 Sant Maloù.

Brest

Kentelioù brezhoneg e Brest. Kroget e vo gant ar c'hentelioù sizhunvezh kentañ miz Here Evit gouzout hiroc'h diwar-benn KANEVEDENN hag he c'hentelioù, pellgomzit da vurev SKED 98.80.26.71, pe da I. Kadored 98.28.10.37

**Deiziataer 1994 ... an distro
13 kenembanner !**

Paper-bibl, div bajenn evit pep sizhunvezh !



Ur gartenn-liv gant holl gërioù pennañ Breizh Troioù-lavar evit pinvidikaat brezhoneg pep hini
Kilometradoù etre kêrioù pennañ Breizh
Penaos ober chekennoù e brezhoneg
Taolenn ar c'hemmadurioù
Roll an holl gevredadoù hag ensavadurioù oc'h ober war-dro sevenadur Breizh !
Mui ur c'harnedig evit ho chomlec'hioù gant, evit ar wech kentañ, holl godoù-post ha stummoù brezhonek anvioù komunioù Breizh



48 lur an tamm e pep lec'h e Breizh.

KELENNER

Post-labour e Liger Atlantel
Emañ an deskadurezh-stad o klask ur c'helenner brezhoneg e departamant Liger-Atlantel, e Kornad Sant Nazer.
Evit gouenn titour hag en em enskrivañ, kit e darempred gant ensellerdi akademiezh Liger-Atlantel, 7 hent Jonelière, 44000 Naoned, pellgomz 51 81 74 74. Titour all digant skourr bro-Naoned Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg : Roland MOGN, 5 str Martinière, 44000 Naoned.

C.E.S.

Bez' emañ embannadurioù An Here o klask un implijad(ez) C.E.S. brezhoneger(ez) evit ul labour sekretouriezh (bizskriñvañ ...). Kas ur c'hurriculum-vitae : An Here, Kergleuz, 29480 Ar Releg-Kerhuon, pg. 98 28 10 37

Bez' emañ Skol An Emsav o klask 2 implijad(ez) CES brezhoneger(ez) evit ul labour sekretouriezh ha mererezh (stummadur kinniget) kas ur c'h.C.V. da Lena Louarn, SAE, 8 ru Hoche 35000 Roazhon.

OBJEKTOUR

Bez' emañ Skol An Emsav o klask un objektour brezhoneger evit miz Du 1993. Post labour liesseurt. Skriñvañ da Lena Louarn, SAE, 8 ru Hoche, 35000 Roazhon ☎ 99 38 75 83.

ANIMATOUR RADIO

Abaoc'h miz Here 91 ez eus un abaden e brezhoneg, Kaol-Teol hec'h anv, war "Fréquence Mutine" e Brest (103,8 mHz, bep Sadorn etre 11e ha kreisteiz hanter).
Prest omp da gregiñ e-barzh en-dro (war-lerc'h ar 15 a viz Gwengolo) goude daou viz ehan en hañv.
Klask 'zo war genlabourerien (a youl vat !). Deus pep seurt skoazell ez eus ezhomm ... Hervez bolontez ha c'hoantoù an dud a vo graet ivez ingal/dizingal, er studio pe er-maez ha me oar me. Ar re o dije c'hoan deskiñ kaozeal dirak ar mikro vo degemeret mat ivez. Dav gouzout disklipeñ e brezhoneg memestra !
Titouroù : Krislian ar Bras, 5 str Broselette, 29200 Brest, pg. 98 46 40 98.

15 BLOAZ

Skol DIWAN an Orient a lido he femzek deiz-ha-bloaz d'ar 24, 25 ha 26 a viz Gwengolo.
Nozvezh ar sonerezh, fest-noz, diviz a-zivout sevenadur Breizh hag an ekonomiezh, fest-deiz, kenstrivadeg dansoù hag all a vo.

DISKOUZEDEG SKRITELLOÙ

Skritelloù-bruderezh evit abadennoù sonerezh, levrioù, boued pe kirri-tan, eus ar bloavezh 1890 da 1935. Skritelloù touristelezh, bet embannet gant kompagnonezhioù tren, o tiskouez lec'hioù bravañ ar vro, gant ar gwellañ saverien-skritelloù ar mare. Betek fin miz Here e mirdi Breizh, e Roazhon.

**Redadeg ar Figaro
BAG SKOLIOU DIWAN, 5VET E SANT-KAE**

Charles Euverte skipper bag Skolioù Diwan, a zo eürus-tre. Pa oa o treuziñ ar mor etre Kinsale ha Breizh, sac'het, pe rediet da vont goustadik-tre war-raok, pa ne oa ket war-gil a-wechoù, e oa o soñjal ne vefe den ebet ken o c'hortoz anezhañ gant an dale bet tapet gant ar redadeg. Padal d'al Lun da noz e oa ur mor a dud hag a oa o c'hortoz anezhañ, hag o stapal o daouarn pa oa bet lavaret en uhelgomzer : " 5vet : Charles Euverte war Skolioù Diwan".



Ar vag erretet o porzh Treboul

UN TROC'HAD KENTAÑ DIAES

Er "Coruña", e Galisia, e oa niverus ivez ar Vretoned hag a oa deuet da zegemer Charles Euverte ha Skolioù Diwan. Ar 15 den a oa du-hont n'o deus ket keuz rak plijadur zo bet daoust d'al labour a oa d'ober. Ar "skoazell degas startijenn" zo deuet dre ret da vezañ ur skoazell deknel evit gellout kompenn e koulz toullou ar vag ha dont a-benn da vezañ war al linenn evit an eil troc'had. Skoazellet eo bet ar skipper gant ur c'harrônsier galisian, bet laouen o welet e oa banniel e vro war ur vag, hini Skolioù Diwan.

AN TELE EVIT AR 15VET

Daoust da Charles bezañ 15vet e A Coruña, ar pezh a zedenne tud Galisia a oa ar fed e rede evit skolioù brezhonek. Setu parak e oa deuet an tele betek ar porzh a-ratozh-kaer evit Charles, ar c'hevredigezhioù difenn ar yezh hag ar sevenadur hag ivez Maria Pilar Garcia Negro, kannadez e Parlamant Galisia. Tout an traoù-se o deus souezhet hag estonet tud

aozadur ar Figaro, Panzianed evit al lodenn vrasañ hag en em c'houlenne penaos e raemp evit tizhout ar media !

UR GRAVATENN E KINSALE

Goude bazañ deuet en-dro e Breizh, e Douarnenez, e-lec'h n'eo bet filmet Charles ha Skolioù Diwan gant F3 en em gavas bigi ar redadeg e Kinsale, e kreisteiz lwerzhon.
A-baoz degouezhet ar porzh en deus gwelet Charles Maer ar gumun o tont da zegemer en un doare ispisial bag Skolioù Diwan, o c'houlenn "Where is the breton language boat?". Amañ ivez e oa kalz pouezsoc'h ar skolioù eget ar redadeg ! Profet ez eus bet da Charles gant an Aotrou Maer ur gravatenn gant livioù kêr Kinsale.

SANT-KAE A-BENN AR FIN !

Lec'het d'ar Gwener vintin eus Kinsale e oa sañset ar rederien gentañ errouet d'ar Sul e Sant-Kae. Allas ! Bag ebet n'he deus diskouezet liv he spi ! Da c'hortoz, evit tremen an amzer, ez eus bet aozet ur mini fest-

deiz tro-dro da stand Diwan gant skoazell bagad Perroz. Un nozvezh hir eo bet goude an noz eus ar Sul d'al Lun met n'eo nemet da 6 eur hanter ez eo bet gwelet E Drouglazet, trec'h evit an troc'had diwezhañ, o tremen al linenn Charles, en zo erretet e-tro 10eur30 noz, 5vet, ha kentañ bizuth (ar re a gemer perzh evit ar wech kentañ). A-benn ar fin e vo Charles 15vet ha trede bizuth war ar redadeg en he fezh.
Ma c'hell Charles bezañ laouen, Diwan ivez, rak brudet eo bet hor skolioù e pep porzh ha dreist-holl e-touesk ar skipperien all : Le Cam, Drouglazet, Jourdain...
An tri-c'hard anezho a zo Breizhiz hag o skipailhoù teknikel ivez. A-hend-all an embregerezhioù hag a oa o skoazellañ bigi o deus gelllet dizoleiñ Diwan evit lod : Super U, Cotten pe anavezout gwelloc'h evit lod all : "Sill Plein Fruit" da skouer.
Ha mard eo re abred evit embann raktresoù, sur eo e vo klasket lakaat da ziwannan tout ar pezh zo bet hadet e-kerzh redadeg ar Figaro.

A.V.C.

Panelloù-hent STOURM AR BREZHONEG E FULOR



Gant tud STOURM AR BREZHONEG Goueled-Leon an hini ez eus bet livet panelloù-hent e-kichen Lokornan-Leon. War an troc'had hent nevez-digoret-se, war an hent D67, n'eus bet lakaet nemet panelloù gallek gant servijou Aveñ an Departamant. Ha se, daoust d'ar pezh a oa bet promet gant Kuzul Meur Penn-ar-Bed e 1990, pa oa bet lavaret e vefe lakaet panelloù "divyezhek" brezhoneg-gallek war gement tamm hent nevez savet gant an Departamant. Amañ adarre, evel er goañv tremenet pa oa bet digoret ur pennad hent nevez e-kichen

Gouenou, n'o deus ket Servijou Aveñ an Departamant hag ar Stad dalc'het kont eus kement-se. Paouezet o doa Stourmerien ar Brezhoneg da livañ panelloù e Penn-ar-Bed e 1990, goude klevet kaozioù tud e penn ar C'huzul Meur. Adkroget o doa ur wech bennak, evel e-kichen Gouenou, un nebeut mizioù zo. Hag ar wech-mañ c'hoazh er c'hreisteiz da Lokornan-Leon. Ha ret e vo dezho adkregiñ da vat gant o livadegoù? Ya, marteze, ma ne vez ket doujet muioc'h d'ar promesaou... ■ S.A.B., B.P. 15, 29480 AR RELEG-KERHUON, BREIZH



bremañ 144 - miz Gwengolo 1993

Manifestadegoù

E fulor ez a ar saverien moc'h e Breizh, abalamour ma tigresek priz ar c'hig-se. E dibenn miz Eost e oa bet un toullad labourerien-douar o livañ luganioù ouzh mogerioù savadurioù stad pe brevez e Breizh-Izel. Ken ez eus bet savet klemm gant D.D.A. Penn-ar-Bed (Renerezh Departamant al Labour-Douar). Aozadurioù all, evel tiez Leclerc, pe Prefeti Penn-ar-Bed, o deus lavaret, diouzh o zu, ne savient ket klemm. Daoust ma oa bet harzet pevar den o skrivañ traou ouzh mogerioù Prefeti Kemper.

An hañv hag ar brezhoneg

A-hervez e plij d'an douristad gwelet ha klevet brezhoneg e-pad o vakañsoù e Breizh. Kement-se a oa bet kavel d'an nebeutañ gant un enklask mennozhioù graet evit Kuzul Meur Penn-ar-Bed. Ha war-raok ez a implij ar brezhoneg ar gouelioù aozet e Breizh e-pad an hañv. Gouel Kann-al-Loar, e Landerneve, eo a ra ar muiañ gant yezh ar vro en e vruderezh, brezhoneg. Euz ha peurunvan ar bloaz-mañ ouzhpenn. E Gouel Etrekeltiek an Oriant ez eus bet gwelet un tammig muioc'h a vrezhoneg ar bloaz-mañ eget ar bloavezhioù kent - met gant faziou siwazh. E gouelioù all avat e chom dister plas ar brezhoneg : e Gouel Sinema Douarnenez ez a war zisteraat a vloaz da vloaz zoken. Ha ne dalv ket ar boan lakaat ar gaoc' war ar gouelioù n'int ket "breizhek". Enno, e Brest, Montroulez, h.a., n'eus tamm pas ebet evit hor yezh. En diskouezadegoù a bep seurt a oa tu da welet er vro e-pad an hañv ne oa ket kalz a vrezhoneg, un tammig muioc'h e Penn-ar-Bed eget en departamantoù all marteze. Ha c'hoazh : dister lodenn ar brezhoneg e Skritellaoueg Breizh, dister ivez en Abati kozh Landevenneg. N'eus nemet Abati Daoulaz ha Park an Arvorig a ra ingal gant ar brezhoneg en o embannoù evit o gweladennerien, met ne vez ket alav difazi o brezhoneg siwazh.

Kudennoù-arc'hant

Diwan
Kalz a dud e Breizh a soñj dezho ez a madik a-walc'h an traoù bremañ gant ar gevredigezh (paer ar skolaerien gant ar Stad hag all ...). Poent sachañ evezh ar Vretoned adarre. Sur a-walc'h, un harz-debriñ gant an Ao. Prezidant hag ur polliker brudet mat pe zaou (lakaomp an Ao. kannad Kastellin, pezh ne rafe ket a zrouk dezhañ ouzhpenn), e-barzh pe dirak ul lec'h "aroueziek" a-walc'h (lakaomp Breujoù Breizh pe gastell an Duked ...) ne vefe ket fall evit se, surtout ma vefe liammet gant un doare "Korrika" (giz ma vez graet en Euskadi, lakomp etre Brest ha Naoned ...). Aes da laret, diaesoc'h d'ober, gouzout a ran ...

Kristian ar Bras

BREIZH UNVAN



Naoned e Breizh C.U.A.B.* bepred war an dachenn

War-lerc'h daouzek vloavezh e penn ar galloud, ned eo ket gant an tu kleiz eo bet diskoulmet ar gudenn ha ned eo ket gant ar re nevez tapet ganto penn levrierezh ar stad c'hall e kemmo an traoù kennebeut, pa embanne nevez 'zo Elisabeth HUBERT, bet dilennet kannadez RPR Liger-Atlantel : "... adunanij

Breizh, ent-melestradurel, pezh na c'hell ket bezañ deuet-mat, n'on ket se ..."

Anat ne chom ket C.U.A.B. hep sevel e vouezh hag hep ober kinnigoù : bez' emañ dazont Breizh, hervez kadoriad ar c'hengor, kostez Europa a ziskouez splann pegen amout eo mennozh ur rannvro "Peydeloar". N'eus nemet rannvroioù un hengoun istorel, douaroniel, armerzhel ha sevenadurel ganto a c'hell lennañ o mad digant Europa.

Ur c'hinnig all a vez skoazellet gant C.U.A.B. ivez : reiñ anv Anna Vreizh («Anna de Bretagne» pa larin mat) da skol veur Naoned. Traoù pleustrekoc'h hag a sell ouzh buhez pemdeziek an dud a vez tabulet ivez gant GUAB : abalamour d'ar vevenn velestradurel etre «rannvro» Breizh hag ar «Peydeloar» lakaet gant ar Gwilenn ne c'hell ket

Redoniz a labour war-du Naoned ober gant ar gartenn "Hermine" nevez lakaet e pleustr gant SNCF, pa c'hell Redoniz a labour war-du Roazhon ober ganti. Kant skouer all a c'hell bezañ roet c'hoazh. A-bouez eo reiñ skoazell da gCUAB. Bez' e c'hell skoazellañ en ur emezeliñ (200 lur gall). CUAB, TI Keltiek, 3 str Harrouys, 44000 Naoned.

* Kengor evit Unanidigezh Melestradurel Breizh Herve Bihan

Bep daou viz lennit
AL LANV
59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper
Koumanant bloaz : 130 lur
Skoazell adalek 160 lur

KARTA EUROPA

PREZEGENN E-PAD GOUEL AN ORIENT

Manifestadeg e Kemper e miz Meurzh '93



D'ar Sadorn 14 a viz Eost ez eus bet dalc'het en oriant ur brezegenn-vreutadeg a-zivout karta Europa ar yezhoù rannvroel pe minorelaet. Kaset a-benn eo bet ar brezegenn-mañ gant Christian Guyonvarc'h, merer strollad Kanevedenn e Breujoù Europa, skoazellet gant Yannick Baron. Emvod ar Gelted a oa tost da echu ha ne oa ket kalz a dud e-barzh ar vediaoueg o selaou Christian Guyonvarc'h, un hanter-kant bennak a oa.

Komzet en-deus hir a-walc'h a-zivout istor Karta Europa hag ivez emzalc'h Bro-Frañs o cheñch abaoe 1984. Da gentañ e oa ar gouarnamant penn-da-benn a-enep d'ar Garta ha bremañ e lavar n'eo nemet ur gudenn a arc'hant. Met broioù a zo en Europa ha n'int ket pinvidik hag o deus graet traoù evit o yezhoù "rannvroel", evel Bro Spagn pe Bro Hongri. A dra-sur n'eo ket se ar wirionez pa ouzomp eo digor-

tre ar Garta ha n'eo ket ret d'ur vro ober kement tra a vez kinniget ganti. Met huñvreomp un tammig. Bez' ez eus e Bro Hongri Slovened, Kroatied, Serbed ha Tsiganed ha gouzout a rit e vez roet dezho gwirioù n'omp ket tost da gaout kentizh ha ma vez kavet pemp dre gant a dud o komz ur yezh arall ? Setu ur skwer da heuliañ, dreist-holl mar fell d'an holl gwazereñ an takadoù peoc'h a chom c'hoazh en Europa. ■ Paskal Belz

UN EMGLEV NEVEZ EVIT GWIRIOU

Eus ar garta d'an emglev nevez Holl lennerien Bremañ a oar mat ez eus bet kinniget warlene gant Kuzul Europa ur Garta evit ar Yezhoù Rannvroel pe Vinorelezhel, a zo bet sinet bremañ gant 12 stad, ket gant an hini C'hall avat ! Un dra bouezusoc'h c'hoazh a vez prientet bremañ gant Kuzul Europa : ur Stagadenn d'an Emglev Europat evit Gwareziñ Gwirioù Mab-Den hag ar Frankizoù Pennañ, diaes da nep stad europat ober heptañ, diwar-benn gwirioù ar minorelezhioù broadel. Da grediñ a zo e vo aprouet dizale ar Stagadenn-se, gant ar mallus ha nec'hus m'eo deuet da vezañ kudenn ar minorelezhioù broadel en Europa a-bezh !



Bodadeg dileurid ar parlamantoù broadel

Pevare emvod ordinal ha daou-ugent Kinnigadur 1201 (1993) e-keñver ur stagadenn, diwar-benn gwirioù ar minorelezhioù broadel, da Emglev Europat Gwirioù Mab-Den, votet d'an 01/02/93.

1. Ar vodadeg a zegas da soñj he c'hinnigadurioù 1134 (1990) ha 1177 (1992)⁽¹⁾ hag he c'hemennadurioù 456 (1990) ha 474 (1992) e-keñver gwirioù ar minorelezhioù. En testennoù he deus divizet d'ar 05/02/92 e c'houlenne digant komite ar vinistred :

I/ echuiñ an abretañ ar gwellañ al labourioù evit sevel ur Garta evit ar Yezhoù Rannvroel pe Vinorelezhel hag ober pep tra evit ma vefe lakaet buan da dalvezout⁽²⁾ ;

II/ aozañ ur Stagadenn, diwar-benn

gwirioù ar minorelezhioù broadel, da Emglev Europat Gwirioù Mab-Den ;

III/ reiñ da Guzul Europa un aozadur-hanterour arbennik.

2. O tivizout, d'an 22/06/92, Karta Europat ar Yezhoù Rannvroel pe Vinorelezhel -un emglev a-berzh Kuzul Europa- en deus Komite ar Vinistred sevenet kinnigoù ar vodadeg war ar poent I. Ar Garta, a ranko bezañ diazez al lezennoù er Stadoù a zo izilli Kuzul Europa, a c'hello ivez heñchañ meur a stad all en dachenn-se a zo ken diaes ha ken kizidik.

3. Da lakaat buan da dalvezout eo ar Garta. Kalonekaus eo m'eo bet sinet dija gant 14 stad izilli Kuzul Europa d'an deiz kentañ (05/11/92) m'eo bet kinniget d'o sinatourioù⁽³⁾. Ret eo mont pelloc'h avat.

4. Goulenn a ra eta ar Vodadeg e vefe sinet ar Garta gant ar Stadoù-

izilli⁽³⁾ n'o deus ket graet c'hoazh ; goulenn a ra digant ar re all he ratifiañ⁽⁴⁾ en ur zegemer ar muiañ posupl eus he mennadoù⁽⁴⁾.

5. Mirout a ra ar Vodadeg ar gwir da zont en-dro diwezhatoc'h war boent an aozadur-hanterour he deus kinniget e grouiñ e Kuzul Europa.

6. Kelaouet eo bet ar Vodadeg diwar-benn ar c'hemenn roet gant Komite ar Vinistred d'ar c'homite-ren evit Gwirioù Mab-Den ha d'ar C'homite-arbennik evit gwarez ar Minorelezhioù broadel ; c'hoant he deus harpañ al labourerien-mañ hag o lakat da vont war-raok buan.

7. En ur lakaat e-barzh Emglev Europat Gwirioù Mab-Den gwirioù 'zo evit an dud a zo izilli ur vinorelezh bennak, e vefe posubl d'an dud-mañ, koulz ha d'an aozadurioù o deus ar gwir da gomz en o anv, implij an doareoù-galv kinniget gant an

AR MINORELEZHIOU BROADEL ?

Emglev, en o zouez ar gwir da glemm dirak ar Gomision⁽⁶⁾ hag al Lez-vam Europat evit Gwirioù Mab-Den.

8. Setu perak e kinnig ar Vodadeg e vefe divizet gant Komite ar Vinistred lakaat ur stagadenn diwar-benn gwirioù ar minorelezhioù broadel da Emglev Europat Gwirioù Mab-Den ; diazezet e vefe ar Stagadenn-se war an destenn da heul, a zo anezhi ur rann wirion eus Kinnigadur ar Vodadeg.

9. Evel ma 'z eus mall bras war ar poent-mañ, a zo unan eus an aferioù pouezusañ a vez studiet bremañ gant Kuzul Europa, e kinnig ivez ar Vodadeg da Gomite ar Vinistred mont buanoc'h gant al labourioù evit ma c'helle Emglev-Meur ar Pennoù Stad ha Gouarnamant e Viena d'an 8 ha 9 a viz Here 1993 divizout ur Stagadenn diwar-benn gwirioù ar minorelezhioù broadel ha he c'hinnig da vezañ sinet adal an deiz-se.

Tostenn kinniget evit ur stagadenn d'an emglev evit gwareziñ gwirioù Mab-Den hag ar frankizoù pennañ, e-keñver an dud a zo izilli eus minorelezhioù broadel

Disklennadur a-raok

Ar Stadoù-mañ, izilli Kuzul Europa o deus sinet da heul, a gav dezho :

1. emañ pinvidigezh ha nerzhusted sevenadur Europa gant he fobloù lies ha disheñvel o doareoù-bevañ ;
2. o deus ar minorelezhioù broadel graet kalz evit reiñ lañs da Stadoù Europa, gant al lies hag an disheñvel m'eo o sevenadurioù ;
3. n'eus nemet oc'h anavezout o gwirioù d'an dud a zo izilli ur vinorelezh vroadel bennak e-barzh ur stad bennak, gant ur gwarez etrevroadel evit ar gwirioù-se, e c'heller echuiñ da vat gant an tabutoù kenel, en ur skoazellañ evel-se diazevadur stabil ar justis, an demokratelezh hag ar peoc'h ;
4. e talvez ar gwirioù-se evit an dud o-unan hag ivez evit o strolladoù kevret.
5. ez eo gwarezadur etrevroadel gwirioù ar minorelezhioù broadel ur

rann ret-holl eus gwarezadur etrevroadel gwirioù mab-den hag evel-se un dachenn a genlabour etrevroadel.

Neuze o deus ar Stadoù-mañ kemeret an disentezioù da heul :

Rann 1 - termenadurioù

Mellad 1
Evit abegoù an emglev-mañ⁽⁷⁾ e vez implijet ar ger "minorelezh vroadel" evit ur strollad tud e-diabarzh ur stad :

a/ a zo o chom war dachennad ar Stad-se hag int koadediz anezhi ;

b/ o deus gant ar stad-se liammoù kozh, stabil ha padus ;

c/ a zo ganto doareoù kenel, sevenadurel, relijiel pe yezhel dezho o-unan ;

d/ a zo niverus a-walc'h daoust dezho bezañ bihanoc'h o niver eget hini peurrest ar boblañs er Stad-se, pe en ur rannvro anezhi ;

e/ a venn mirout a-gvret ar pezh a ra o fersonelezh voutin, gant o sevenadur, o hengounioù, o relijiel pe o yezh.

Rann 2 - reolennoù diazez

Mellad 2
1. Bezañ ezel ur vinorelezh vroadel a dle bezañ choazet en un doare dieub gant pep hini.

2. Nep hini ne dle bezañ koll gant ar choaz-se, pe o chom hep ober anezhañ.

Mellad 3
1. Nep ezel eus ur vinorelezh vroadel en deus ar gwir da eztaoliñ, mirout ha dioren e pep frankiz e bersonelezh arbennik, ken e-keñver relijiel, kenel, yezh ha sevenadur, hep ma vefe klasket he cheñch enep e volontez.

2. nep ezel eus ur vinorelezh vroadel a c'hell ober gant e wirioù pe en e bart e-unan pe a-gvret gant tud all.

Mellad 4
Nep ezel eus ur vinorelezh vroadel en deus ar memes gwirioù hag ar re all e-keñver lezenn. Difennet eo nep droukziforc'hañ enep unan dre an abeg ma vefe ezel ur vinorelezh vroadel.

Mellad 5
Difennet eo kemmañ a-ratozh feur ar boblañsoù en ur rannvro ma vev enni

ur vinorelezh vroadel, evit nozout da homañ.

Mellad 6
Holl izilli ur vinorelezh vroadel o deus ar gwir da grouiñ o aozadurioù dezho o-unan, zoken strolladoù politikel.

Mellad 7
1. Nep ezel eus ur vinorelezh vroadel en deus ar gwir da implij e yezh e pep frankiz e metoù prevez hag er metoù boutin, dre gomz koulz ha dre skrid. Ar gwir-mañ a dalvez ivez evit implij e yezh en embannadurioù da vezañ lennet, klevet ha gwelet.

2. Nep ezel eus ur vinorelezh vroadel en deus ar gwir da implij e anv hag e anvioù-bihan en e yezh-vamm hag ar gwir ma vefent anavezet ez-ofisiel.

3. Er rannvroioù ma vev kalz tud eus ur vinorelezh vroadel, o deus an izilli anezhi ar gwir da implij o yezh-vamm en o darempredoù gant an aotrouniezhioù melestradurel hag en o frouezadurioù dirak al lezioù-barn hag an aotrouniezhioù lezennel.

4. Er rannvroioù ma vev kalz tud eus ur vinorelezh vroadel, o deus hec'h izilli ar gwir da embann en e yezh anvioù-lec'h, skriteleoù, enskrivadurioù, hag a bep seurt danvez-kelaouañ lakaet e gwel an holl. Komant-mañ ne da ket sivep gwir an aotrouniezhioù da embann an danvez-kelaouañ-se e yezh, pe yezhoù, ofisiel ar Stad.

Mellad 8
1. Nep ezel eus ur vinorelezh vroadel en deus ar gwir da zeskiñ e yezh-vamm ha bezañ kelennet en e yezh-vamm en un niver dereat a skolioù hag a aozadurioù boutin evit kelenn ha stummañ ; ar re-mañ a dle bezañ lakaet evel m'emañ lec'hiet ar vinorelezh.

2. Ar gwir o deus izilli ur vinorelezh vroadel da grouiñ ha da verañ, e-barzh framm lezennel ar stad, o skolioù hag o aozadurioù kelenn ha stummañ dezho o-unan.

Mellad 9
Ma vez lamallet e vije bet gwallet ar gwirioù gwarezet gant ar Stagadenn-mañ, en deus nep ezel eus ur vinorelezh vroadel, pe nep kannaderezh anezho, ar gwir da broseñ en un doare eledus dirak un aotrouniezh eus ar Stad.

Mellad 10
Nep ezel eus ur vinorelezh vroadel en deus ar gwir, gant ma toujo pizh da anterinded tachennadur ar Stad, da gaout darempredoù frank ha distrob gant keodediz ur vro all a zo ganto ar memes doareoù arbennik, e-keñver keneal, relijion, yezh pe sevenadur.

Mellad 11
Er rannvroioù ma 'z int ar muiañ niver, o deus an izili eus ur vinorelezh vroadel ar gwir da gaout aozadurioù melestradurel lec'hel pe emren, diouzh o saviad e-keñver istor ha douaroniezh, hag hervez lezennoù diabarzh ar Stad.

Rann 4 - doareoù da lakaat ar Stagadenn da dalvezout

Mellad 12
1. Netra er Stagadenn-mañ ne c'hell bezañ implijet evit krennañ ur gwir personel da nep ezel eus ur vinorelezh vroadel, pe ur gwir strollel eviti en he fezh, a vefe bet lakaet dija e-barzh un emglev etrevroadel m'he defe kemeret perzh emañ.
2. Ne vo ket kavet drokuziforc'hus an disenteziou a zo o fal nemeto gwarezin ar minorelezhioù broadel,

harpañ o diorroadur a-zaore, ha startaat e vefe graet outo gant ar memes gwirioù ha doareoù-ober hag ouzh ar peurrest eus ar boblañs en tachennoù melestradurel, politikel, ekonomikel, sokial, sevenadurel, hag all.

Mellad 13
Ar gwirioù ha frankizoù meneget gant ar Stagadenn-mañ a zo talvoudek ivez evit izili ar boblañs a zo ar bihanniver ganto er Stad a-bezh ma 'z eus anezho avat ur vinorelezh en ur rannvro bennak (pe veur a hini) anezhi.

Mellad 14
An ober gant ar gwirioù ha frankizoù meneget gant ar Stagadenn-mañ ne c'hell ket krennañ an dleadoù hag ar c'hriegerzhioù a ya gant keodedelezh ur Stad. Koulskoude, ar bevennoù a vefe lakaet gant al lezenn ne c'hellfent kaout o orin hag o abeg, en ur gevredigezh demokratel, nemet evit difenn surentez ar vro, anterinded he zachennadur pe surentez an holl, an urzh vat hag ar stourm enep an torfedoù, gwarezadur ar yec'hed pe ar vuhezgezh vat, kouls ha gwirioù ha frankizoù an dud all.

Notennoù gant an troour

- 1. Embannet eo bet aro c'hinnigadurioù-se war vBremañ niv. 118-119 (Gouere-Eost 1991), p. 17., ha niv. 130-131 (Gouere-Eost 1992), p. 10.
2. Sinet eo bet diouzhtu ar Garta gant 11 Stad, d'ar 5 a viz Du 1992: Aostria, Danmark, Suomi, Alamagn, Hungaria, Liechtenstein, Luksembourg, Malta, an Izelvroioù, Norvegia ha Spagn. Sinet e vefe bet ivez, nevez 'zo, gant ar Rouantelezh-Unanet. War a sobant n'eo ket bet ratifiet gant nep Stad choazh.
3. Bro-Chall en o zouez, anat d'an holl!
4. pep stad a rank kemer 35 mennad d'an nebeutañ diwar ar re a zo e-barzh rann 3 a r Garta (mennadoù pleustrek).
5. Netra d'ober gant Komision Brussels Keduilezh Europa! Un aozadur eus Kuzul Europa eo ar Gomision-se, a ra war-dro ar c'hlemmoù diwar-benn Gwirioù Mab-Den a-raok ma velent kaset-ma 'z eus ezhomm-dal Lezvarn.
B. Kadored

Kendalc'h Keltiek Etrevroadel 93

En Inverness (Skos) eo en em vodet ar C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel. An davez a oa «Ar yaouankiz hag ar broioù keltiek». Un tamm mat a dud a oa deuet eus pep bro gellek. Divizet eo bet krouiñ ul lec'h evit unan yaouank, dimdan 30 bloaz, e burev pep skourr.

Ul labour bras eo sevel ur seurt kendalc'h. Goulenn a ra digant holl mignoned ar broioù keltiek mont da ezel eus skourr Breizh ar c'hendalc'h, o kas ur chekenn 5000 lur gant o anv ha chomic'h.

Mennad ar yezh kembraeg, e-pad m'eo devo kannaded saoz, hag a soursi nebeut pe tamm ebet eus ar c'hembraeg, o c'her da reiñ evit divizout eus he zonkad. Ar C'hendalc'h Keltiek, bodet en Inverness e Gouere 1993, a sav a-enep an diviz-se, hag a c'houlenn groñs digant ar sekretour a stad reiñ en-dro da holl gannaded Kembre o gwirioù demokratel.

Mennadoù a zo bet kemeret ivez e dibenn ar c'hendalc'h, hag a gavot pelloc'h. Er bloaz 1994 e vo ar c'hendalc'h e Kerne Veur, da vare Pask, e Falmoth, war danvez «Ar broioù keltiek hag ar wareg atlantel». An dud dedennet gant aozadur perzh Breizh er c'hendalc'h-se a c'hell skrivañ d'ar skourr breizhat, 5, str Berlioz, 29600 Plourin Montroulez. Hag er bloaz 1995 e vo e Breizh, Kêr an oriant a zo bet dibabet evit resev ar c'hendalc'h. Poent eo kregiñ diouzhtu gant aozadur ar c'hendalc'h. Goulenn a ra ar skourr breizhat digant an holl dud prest da gemer perzh er bodad lec'hel aozañ da vont e darempred gantañ, evit kregiñ gant al labour e mez Gwengolo 1993.

Mennadoù mouezhiat
1. Ar c'hendalc'h Keltiek Etrevroadel a c'houlenn digant ar Gouarnamantoù Saoz ha Gall d'en em glevet gant dilennidi ar yezhoù minorelet e Breizh-Veur hag er Frañs, evit sevel reolennoù d'o lakaat gouest da sinañ Karta Europa ar Yezhoù minorelet hep mui a dale.
2. Ar sekretour a stad evit Kembre, Mr John REDWOOD, en deus lakaet a-gostez ur reolenn eus Kamb ar Gumunioù, hag a aotree al lezennoù o tenañ da Gembre hepken da vezañ tabudet gant dilennidi Kembre hepken, en emvod kuzul ar Gumunioù. Er mod-se, kalz a gannaded kembreat a zo bet laosket a-gostez d'ar Brezhoneg er skolioù. ■



AN EISTEDDFOD

Gouel meur ar c'hembraeg e-pad ur sizhunvezh

Etre 15 hag 20 000 a dud o tont e-barzh bemdez... Grit ar gont : 150 000 den bennak o tont d'ur gouel holgembraek ! Mouzhet e hafval bezañ ar Vretoned ouzh Kembre avat. Ret e oa klask pell evit kavout ur Breizhad bennak war dachenn an Eisteddfod. «Petra 'ri, n'emañ ket mui Kembre diouzh ar c'hiz. Da Euskadi ez a an dud bremañ...»

Al liammoù etre Kembre ha Breizh, un afer a c'hiz nemetken ? Biskoazh kemend-all !

Mont pelloc'h

Chom a ra bremañ da lakaat ar c'hlenlabour etre an div vro da vont war-raok. Pegoluz Moutig e kembraeg ? Peur e vo tu da lenn ar gwellañ skridoù kembraek a-vremañ e brezhoneg ? Peur e vo gweliet tresadennoù-bev dispar S4C e brezhoneg ? Hag an 200 strollad rock, ya 200 l, kembraek a zo ? Talvezout a rafe an han lakaat ar re wellañ anezho da zont da Vreizh. Evit ma teuo lod eus an traoù-mañ da wir e ve mat kemer skouer, ur wech ouzhpenn, war Gembraiz. Lakaomp niver izili ar c'hevredad Breizh-Kembre da greskiñ ha lakaomp e balioù da vezañ re ar c'hevredad Cymru-Llydaw :
• Skoazellañ ar vrezhonegerien da zeskiñ kembraeg. (Evit a sell ouzh ar c'hallegerien e vo gwelloc'h dezho deskiñ brezhoneg da gentañ...)
• Kelaoñ war ar pezh a c'hoarvez e Kembre hag aesaat an eskemmoù par ma c'heller.
• Skoazellañ Kembreiz, mar geller, e degouezhioù resis.
Gant ma ouezimp skoulmañ liammoù padus ha start gant Kembre e c'hellimp gounit kalz amzer evit ober ur yezh a-vremañ eus hor predeneg.
Olier ar Mogn

Brezhonegerien a-leizh

Gant Skol-Uhel ar Vro e oa dalc'het stand Breizh hevlene, Levrioù, bladennoù, krezioù-T (evel ma lavar kembreiz), pegsunioù a oa deuet eus ar vro. Gant ar c'hevredad Cymru-Llydaw (Kembre-Breizh) e oa bet roet bod da stal Skol-Uhel ar Vro. Aozet e oa bet ganto un diskouezadeg plijus diwar-benn stad ar yezh. Gredus hag efedus eo o doare da labourat. Souezhus eo an niver a Gembraiz hon eus klevet o komz brezhoneg. Peadra da lakaat sifroù zo da greskiñ un tamm ! Muioch eget darc'hel stand zo bet graet gant ar Vretoned avat. Gant tud ar c'hevredad Cymru-Llydaw, ha Tecwyn Evans ispisial, e oa bet orientet an traoù eus ar c'hentañ, ha tu zo bet da gejañ gant tud a bep seurt, dedennusoc'h an eil re evit ar re all. Darempredoù zo bet skoulmet evel-se war dachenn al lennegezh, an aozadurioù kas ar yezh war-raok, ar c'hevredadoù difenn an natur, an urzhiaerezh hag ur bern tachennoù all c'hoazh.

Niver ar gembraegerien o kreskiñ

Hervez un enklask kaset e-doug ar bloavezh 1992 hag embannet e dibenn mez Gouhere e lavar 21.5% eus poblañs Kembre bezañ barsek da gomz ar yezh, ha 16.9% barrek-mat. Gwynedd eo ar gontelezh kembraekañ (66.9%), e-skoaz Gwent an hini digembraekañ (4.8%). «Ha mar bez dalc'hel kont eus ar re a aozar bezañ treut o c'hembraeg ez eo ouzhpenn an drederenn eus an dud, -hag ouzhpenn an hanter eus hor bugale-, a zo gouest da gomz kembraeg un tamm bennak», eme Sir Wyn Roberts, ministr Kembre. Dam'houde embannadur ar sifroù-se e voe diskouezet ur c'hresk e niver seloquerion Radio Cymru, ar skingomz holgembraek. Hogen kement-se a rank bezañ lakaet keñver-ha-keñver ouzh ur studienn all kaset gant Anthony Parker, lenner e skol-veur Kêrêz, hag a ziskouez un digresk e baregzhioù yezhel ar re yaouank hag ma'z eont gant o studioù, e-skoaz an 20% a wigoù e vezañ kelennet e kembraeg er c'hentañ derez e ranker gouzout n'eus ken 3% eus ar yaouankizoù o tremen amodoñnoù dibenn eil-derez e kembraeg. Kalz muioch a evezh a rank bezañ taolet er skolioù eil-derez a-benn digoull al falis bet roet d'ar c'hembraeg er skolioù kentañ-derez e-kreiz an dek vloaz tremenet, eme an imbouc'hel. ■

EUSKADI

Filipe BIDART lakaet en digenvez Kaset da doullbac'h ar "Santé" d'ar 17 a viz Eost, ha lakaet en digenvez rik e rank Filipe BIDART talañ ouzh an aozoù bac'hañ en doa gouzañvet e 1988 hag a oa bet anvet "bourreviezh gwenn" gant Amnesty International. Gant CAR e vez diskuliet an doareoù dizenel-se «o fal lakaat ar bac'had da goll e holl spisverkoù», hag ouzhpenn-se «nac'hañ ma vez graet ouzh emsaverien Euzkadi en toull-bac'h Fresnes d'en em vodañ, ar pezh a dalv e van Gaby MOUESCA en digenvez evit gwir abaoe meur a viz».



War eiz veur Mebenn Frañs, un nebeut mzoù 'zo

SPAGN

En ur gaoued Serret en ur gaoued a vir an doenn goloet anezhi da welout an oabl, se eo ar "valeadenn" bemeziek a vez aotreet da c'hwec'h prizoniad politikel euskarat, en o zouez ar bayonad Unai PAROT, e toull bac'h "dreist arnevez" Valdemoro (Madrid). Ouzhpenn-se ez eo ret dezho en em ziviskañ en noazh meur a wezh bemezik (daoust dezho bezañ en digenvez, eleze dizarempred) ha miret e vez outo mont en o gourvez war an deiz. Ouzh an aozoù bac'hañ-se e nac'h ar brizonidi kuitaat o c'hellig hag emaint e sell mont en harz-debrñ.

Dimezet hag euredet Ur c'hendalc'h zo bet dalc'het e Madrid gant beleion gatolik dimezet. Kantadoù anezho a oa bodet da zivizout war o stad ha war o darempredoù ouzh ar Vatikan. Klouet e voe ar c'hendalc'h gant un oferenñ kenlidet.

Amzer gozh Lestr-bale ar General Franco zo da vezañ troet en un davarn. Prenet eo bet gant Lazaro González González digant ar morlu da vezañ ul lec'h da welout kounennoù eus an diktator kozh, arvestiñ ouzh filmoù keleier ar prantad-hont ha pakañ banneoù en hiraezh d'an amzer gozh.

H.K.

AMERIKA

Lazhadeg e su Amerika E miz Eost e voe drouklazhet Indianed Yanomani en hanternoz Brazil gant klaskerien aour eus Amazonia. Abaoe 1987 e vez alouvet tamm-ha-tamm bro an Indianed Yanomani gant klaskerien aour. Ken e rankas gouarnamant Brazil reiñ ur bastell-vro miret dezho e 1991, ur vro bras evel Portugal. N'eo ket se avat en deus lakaet un dibenn d'al lazhadegou. Ha gwashoc'h zo : "Lezel ober ar vuntreier a ra gouarnamant Brazil" eme skourr Amnesty International ar vro-hont.

KELAOUENN Breizh gant ar mintil. Keleier berr Gouelioù ha festoù noz Stajou - sonerezh, koroll, brezhoneg Chomlec'hioù, lidoù ar bep-seurt Levrioù nevez embannet Sikl Ulhel ar Vro. Keleier e brezhoneg hag e galleg. Kasit keleier deomp 99 87 69 12 faks 99 63 62 28. 3615 KELA

Toullou-bac'h Spagn

Lezet eo bet da vont en e frankiz ar Gall Jean-Christophe Casabonne a oa bet bet kondaonet d'an toullbac'h e Madrid e 1987. Tremenet en deus 6 vloaz 'ta e toullou-bac'h Spagn, war-lerc'h ma oa bet tamallet dezhañ gant Justis ar vro-se bezañ roet sikour da ETA, arme kuzh Euskadi. Dre ma n'en deus morse asantet diskleriañ en doa keuz 'd'ar pezh en doa graet", n'eo ket bet krennet e brantad bac'h evel ma veze kinniget dezhañ gant ar Spagnolek, hag ivez gant ar gouarnamant gall. En un emvod kelaouiñ e Baiona, en Hanternoz Euskadi, e penn kentañ miz Gouere, e tisklerias Casabonne e oa bet gwallgaset gant ar Guardia Civil (polis Spagn) ha gant gwarded an toullou-bac'h. Da geñver an emvod-se e adembannas Casabonne e skoazell da stourm broadel Euskadi.

I.K.

BULGARIA

Addouaret eo bet kalon ar roue Boris, a renas war Vulgaria betek ar brezel bed diwezhañ. Adkavet e oa bet ar galon en ur jarl e liorz ur palez kozh, ma oa bet bez Boris ivez. Distrujet e oa bet ar bez gant polis ar renad komunour e 1954.

IWERZHON

Lidet eo bet 50t deiz-ha-bloaz ar "c'hafe iwerzhonat" (Irish coffee) e Foyles, Co. Lymmneach. Pell a vezañ un evaj hengounel (?) e voe ijinet ar maskaj gant Joe Sheridan, keginour en aerborzh Shannon, da dommañ d'an dreizherion rivet gant o beaj adreuz d'ar mor Atlantel.

Emlazh

An emlazh ne vo ket un torfed en iwerzhon ken, hervez ul lezenn nevez-votet eno. Hervez ul lezenn eus 1936 a dalveze betek-henn e oa un torfed klask en em lazhañ, ha kement-se a veze kastizet garv gant al lezioù-barn a gondaone ar re a c'hwite war o zaol d'an toull-bac'h. Hiziviken ne vo ket un torfed ken; hogen skoazellañ pe broudat tud danvez- emlazherien a vo c'hoazh kastizet gant al lezioù.

TCHEKIA

Embannet en deus ar General Jiri Nekvasil digareziou an arme evit bezañ mouget manifestadegoù 1969, bloaz war-lerc'h aloubadenn Eost 1968 gant ar Soviediz. En Eost 1969 e voe lazhet pevar den gant an arme Praha hag e Brno. Boris Yeltsin, prezidant Rusia, a lakañ anv ar kiriegezh Rusia e Ruzstradur "Nevez-Hañv Praha". En 1991 e sinañ un emglev a vignoniezh gant Praha, hag unan all gant Bratislava, e Breizh Slovakia, un nebeut arvezhoù war-lerc'h, e tisklerie ar vier meur Rusia: "Ne c'hall ket Rusia bezañ lakaet da gablus, pa oa un diviz a-berzh URSS kozh hag he levrierion."

RUSIA

Harz zo bet lakaet war advroañ un 2 500 bennak a soudarded rusian staliet c'hoazh e Lituania. Faeh eo aet ar Rusianed o vezañ kunijennet ha taget gant ar boblañs, ha faehoc'h c'hoazh gant gouarnamant Lituania o c'houlenn un digoll a ouzhpenn 800 miliard a lurioù gall evit bezañ bet e dalc'h ar Soviediz e-pad 50 vloaz. Nac'h a ra Rusia sammañ kiriegezhioù an Unvaniezh Soviedel kozh e Lituania evel e lec'h all. "War o zu sioul e vo kemeret an traoù," eme ministr aferioù diavaez Lituania.

GRES

E-kerz miz Eost e oa bet roue kozh Gres, Kontantinos II, oc'h ober un droiad er vro ma oa o ren betek 1967. Ar "birc'hirinded fromus d'e vro" (hervez gerioù ar roue e-unan) a droas buan da reuz, gant an tu kleiz o youc'h'al, o vanifestiñ evit ma ve skarzhet Koustantinos hag o'n em gannañ ouzh rouealourion. "Ne vo ket lakaet an demokratelezh nag hon renad en arvar gant seurt traoù," eme brezidant Karamanlis, "hogen reiñ tro da c'hoarzhin goap eus hor bro ne lavaran ket." Kemenn a voe roet d'an arme heuliañ bag ar roue kozh en he c'hantredoù, hag an ambrougadeg a badas betek ma voe prometet gant Koustantinos chom pell eus al lec'hioù darempredet-stank.

SLOVAKIA

Brezel ar panelloù hungarek oc'h adkregiñ

Gouarnamant Bratislava a zo o paouez adiansañ brezel ar panelloù skrivet anvioù hungarek warno er c'hunioù Slovakia e-lec'h m'amañ bodet ar vinorelezh hungarek en ur lakaat ar panelloù-se da vezañ divontet e daouez kériadenn. Goude d'ar gouarnamant bezañ klasket lennañ ar panelloù ur wech kentañ en diskaramzer tremenet e oa bet kavet un emglev : ar panell glas gant an anv hungarek a voe lakaet un nebeud metradoù a-dreñv ar panell ofisiel slovak e gwenn.

"Torridigezh gwirioù ar bihanniveroù" Nac'het o deus maered Nove Zamky, Dunajaka Streda ha Komarno, teir c'hêr penn-departamant annezet gant Hungariz dreist-holl, lakaat da dalvezout kelc'h-lizher ministr an dezougen a c'houlenne digant ar renerien lec'hel lemel ar panelloù "dre an nerzh mar bez ezhomm o c'hervel ar polis ma sav ar boblañs a-enep".

Annezidi Momarno (90% a Hungariz anezho) o deus adlivet an anv hungarek Komarom rag-eeun war ar panell ofisiel slovak.

Renerien strollad ar vinorelezh e Bratislava o deus divizet ober klemm ouzh Kuzul Europa a-enep "torridigezhioù stank gwirioù ar bihanniveroù daoust da bromesaou ar ministr kentañ Vladimir Meciar", promesaou o doa roet an tu da Slovakia da zont da vezañ ezel ar C'huzul d'an 30 a viz Mezheven diwezhañ.

An darvoud-mañ a zo c'hoarvezet un nebeud devezhoù goude m'eo bet divizet gant Meciar adkas evit un eil lennadur ul lezenn frankizour war an anvioù hag ar c'hentanvioù, erbedet gant Kuzul Europa.

Al lezenn-mañ, degemeret gant ar Parlament d'ar 7 a viz Gouere a aotree izili ar bihanniveroù da zibab kentanvioù estren, ar merc'hed da zougen un anv tiegezh estren hep an dibenn-ger "ova" ha servijoù ar tiez-kêr da sevel paperioù ganidigezh e yezhoù ar bihanniveroù. ■

M. P. e Pracha - Le Monde 07/09/93 Troet gant P. Lanoe

KAZETENNOU BREIZH L'Avenir de la Bretagne (POBL) 150L/bloaz BP 4103 - 22041 Sant Briag Cedex 2. Combat Breton (Emgann) 150L/bloaz BP 71 - 22202 Gwengamp Cedex. Le Peuple Breton (UDB) 160L/bloaz BP 301 - 22304 Lannhon Cedex. Armor magazine 225L/bloaz Pont Sant Jakéz BP 419 22404 Lambal Cedex

Ar gevredigezh Breizh-Kroatia-Bosnia-Herzegovina ach aozo ur fest-noz evit skoazellañ pobloù Bro Yougoslavia kent, d'ar Sadorn 25 a viz Gwengolo, da 9e noz, e sal ar Family e Landerne, gant SKOLVAN, ar c'hoarezed L'HOUR, Le HIRBODERIOU, FALCHUN-BOZEC. Ar gouniñ a ra diouer da ospital Mostar ha da sikour repulidi Tuzepti.

Freuz e politikerezh Pakistan ETRE KORNOG HAG ISLAM

Gwall luziet eo ar politikerezh e Pakistan. Hollc'halloudus eo ar prezidant, met enebiañ a ra an Uslez outañ ; ar Maodiern kentañ n'emañ ket ar brasañ niver gantañ ken. Ha se e-kreiz ar reuz e Kachmir hag en Afc'hanistan.



Kachmired evit dieubidigezh o bro

Dramm ha relijion

«Dav e ve teuler an trubard hag enebour ar Pakistan-se e mor Arabia», eme an Ao. Nawaz SHARIF ouzh ar Prezidant Ghulam Ishaq KHAN. Ha daoust ma 'z eus galloudoù dreist gant ar Prezidant abaoe 1985, e tro ar re o deus da c'houzafiñ ar muiañ eus kement-se a-du gantañ : ar c'hev're muzulmat renet gant Khan M. JUNEJO (bet e penn ar gouarnamant betek 1988) ha strollad Poble Pakistan renet gant Benazir BHUTTO (bet e penn ar gouarnamant betek 1990). Ha Nawaz SHARIF, maodiern kentañ, d'en em gavout e-unan ouzh ar Prezidant. Gwall wan eo an daou zen avat, pa vez nac'het disenteziou ar Prezidant gant Uslez Pakistan, ha pa n'eus nemet ur brasvire a-du gant Nawaz SHARIF er Vodadeg Vroadel ha bihanniveroù er peder Bodadeg-Proviñs. Ha gant se ur steudad politikourien ha penngadourien, enebiezhoù klannou, gwallskoueriou, «aferiou» a laka diasar ar vuhez demokratel er vro.

Ret eo liammañ an traoù-se gant ar savied etrebroadel. Da goulz ar brezel e Pleg-mor Persia o oa en em ziskouezet Nawaz SHARIF a-du-krenn gant ar c'hornôg. Prederiet eo pennoù Washington gant roll Pakistan e brezelioù diabarzh Afc'hanistan hag e reuz Penjab ha Kachmir (tu India). War-lerc'h darvoudoù Ayodhya e miz Kerzu 92 (s.o. Bremañ nnn 141) ez eo aet an darempredoù etre Islamabad ha New-Delhi war-washaat. Hervez ar CIA eo louzet liveoù politikel uhelañ Pakistan gant flod an heroina a vez implijet da skoazellañ disrannerien e Kachmir, hag e c'helle bezañ lakaet anv Pakistan war "roll ar stadoù sponterien". Pezh 'zo, o deus pemp mil Pakistanad kemeret perzh en emellerezh e Somalia, ha krefiv eo al lobi pakistangar er Pempkorreg ■

Y.V. Thorel

TIBET

Da vare manifestadeg ar 24vet a viz Mae e Lhasa e oa bet lazhet ur bugel hag un den deuet, ha gloadet 88 den, hervez gouarnamant Tibet en harlu (s.o. Bremañ nnn 142/143). Abaoe o deus dalc'het Tibet, renet gant menezh, da vanifestiñ a-hed mizvezh Even e 200, ha war ar maeziou ivez avat. 800 den zo bet kraouet.

A. Nanda

An arm derc'hanel abaoe 87

Anzavet en doa ar jeneral Mirza Aslam BEG d'an 22l a viz Gouhere diwezhañ o doa Pakistaniz an arm derc'hanel abaoe 87. «Ken barrek hag Indeziz omp da fardañ bombezennoù derc'hanel», emezañ c'hoazh. Indeziz o doa lakaet o bombezenn gentañ da darzhañ e 1974. Nac'het eo pennoù India ha re ar Stadoù-Unanel, na skoazellont mui Pakistan war an dachenn-se abaoe 1990. N'o deus ket Islamabad ha New-Delhi sinet an Emglev skornañ an oberiantiz derc'hanel. E "goudor" ar vombezenn e c'helle Islamabad dilezel ar stourm hollislaimegour. Hag e gwir e hafval ar jeneral NAWAZ hag an lt. BHUTTO, a oa bet skarzhet gant an islamgarourien, bezañ adunvanet.

Y.V.T.

Prizioù devezh

kenstrivadeg filmoù Breizh
Start e oa bet d'ar varnerien ober an dibab e-touez an 22 film ha video o c'henstrivañ. 23 film all maez-kenstrivadeg a veze kinniget d'an dud ivez. Aet eo ar maout pemp gwech diwar 8 gant daou film, mui meneg kenstrivadeg 93 Douarnenez. 5 maouez yaouank eus FEMIS o deus degemeret ar prizioù-mañ evit bezañ savet ar film "Terre-Neuvas", ha Laurent GORGIARD evit e vunlenn "tresaden-vev" produet gant Lazennec-Bretagne. Meneg AR MEN a zo aet, gant gwir abeg, gant Jean-Louis LE TACON evit e film "L'Arpenteur des Mers" (Lazennec Bretagne). Priz F3 West a zo aet gant film Jean RELET (Tom-Pouce Production) "Dubigeon".

Gouel sinema (ar minorelezhoù*) e Douarnenez

Bep bloaz e vezer skoet gant danvez ar Gouel, n'eus forzh an dodenn kinniget. Hag er bloaz-mañ muioch eget warlene ? Bro-Iwerzhon, gwir eo, a oa anat a-walc'h. Ne oa ket souezhus gwelout he filmoù diskouezet e Breizh ha degemeret mat-tre e oa bet gant an holl, filmgarourien pe get.

Er bloaz-mañ, neuze, e-giz ma oa bet meneget e-barzh niverenn an hañv, e omp "o vont da zizoloñ sinemaioù ar broioù pell". Gant an Indez, gwir millamm a bobl ha sevenadurioù ma 'z eus, ez eus bet sachet kalz muioch a dud eget na vefe bet soñjet e penn-kentañ, evit klask anavezout un tamm gwelloc'h ar c'hevandir kevrenus-se, ha da gentañ-penn e filmoù niverus-puilh. Tra-walc'h e oa heuliañ an daou zvezh staj war istor, douaroniezh, kavredigezh, armerzh ha politikerezh ar vro ken bras ha honnezh, gant ar brudet e-giz Gérard HEUZE, gwredadour, a zo o studiañ an Indez abaoe pemzek vloaz bennak. Anand PATWARDHAN, filmaozer, sevenet gentañ meur a film, «Bombay hor blues», Mohan AGASHE, aktour ha bedvezeg brudet en Indez, ha div innadez ar gouarnamant, Alka NANDA ha Prema KARANTH.

Daoust d'ar gouel bezañ ivez moarvat ur gouviadenn da veajiñ, evit mont da welout da vat ur vro damzizoloet war ar skramm, e c'heller en em c'houlenn mard eo posupl evit an Indez ... «*Dr béiech kregin pa 'z eer da Vro-Indez ?*» a c'houlenne ar stajidi. Gant an eostad indezad-mañ ez eus bet savet koulskoude un nebeud prederioù hag ur wir strivadenn evit labourat en donder, hep ankounac'haat evel-just ur gejadenn a vignonezh etre ar pobloù hag o sevenadurioù. Peadra d'en em soñjal ha da gaout c'hoant da anavezout gwelloc'h ur vro ken diamen ■

*Siwazh ! Minorelezhioù etre kromelloù peogwir ne oa ket meneget war gazetenn bennozhiek ar gouel ... da skouer ... !



Gérard HEUZE e-pad ar staj daou zvezh

Labour ar vugale

Betek ar bloavezh 1989 e oa ul lezenn ofisiel o tifenn dindan an embregerezhioù implij ar vugale dindan 14 vloaz, dibaoe eo diskennet da 12 vloaz.

N'eo ket mui doujet tamm ebet d'al lezenn-se, ha gwelet war alies bugale 6,8 pe 10 vloaz o labour ar 10 eurvezh an deiz.

Kevredigezhioù «Difenn ha gwarezin bugale Indez» zo bet savet nevez 'zo, met en un doare lec'hel nemetken, ha nebeut a galloud ganto ■

Skinwel

N'eus ket pell 'zo eo staliet ar skinwel en indez.

Ul lodenn vras eus ar familhoù n'o deus tamm skinwel ebet er gêr. Dav eo gouzout e c'houlene ur mezeg tro 1000 lur ar miz, ha ret dezhañ lakaat 5 gopr evit kaout ur benveg bennak (foto, sonerezh, h.a.). Ur chadenn vroadel a zo bet krouet, mui chadennoù prenet ha prevez. Dre ar bruderezh er skinwel ez eus bet krouet ur bern ezhommoù, ha diorran «kleved ar prenañ» en India a-bezh ■

Festival Douarn', devezh ar filmoù breton

Pelec'h emañ ar vrezhonegerien-emsaverien ? Rouez-kenañ tro-dro d'ar sal-video pe d'ar sine, stankoc'h avat en-dro d'ar stand bier en traoñ d'ar bienn (ha n'eo ket tud Diwan Kemper, a ra war-dro, az aio da glemm !), hini ebet kouz lavaret evit taol-rond filmaozourien Breizh. Ma ... evel ma vefe ar "selled ha kleved" un arz a eil renk hag ur c'holl-amzer ober war e dro. Dias war-lerc'h mont da glemm peogwir ne vez roet ur plas dereat d'hoñ yezh er festival pe da stourm evit ma vefe krouet ur chadenn e brezhoneg.

Justamant ... ur pennad e Ouest France (28/08/93) : «Tela : ur c'hoar evit Arle e 1994». Divizet gant Ballamour krouiñ ur chadenn nevez (arc'hantaouet gant ar stad c'hall), skignet war ar Svel kozh a-raok 19e, unan a vefe evit "ar ra dilabour, tud ar banlevioù, familhoù eus an tachennoù rouez an dud anno" (Kreiz-Breizh ?), hervez ar sanedour Laiffite. Ur chadenn evit "ar ouiziegezh, ar stummadur hag al labour". Na lavar ket ar c'hazelennner pelec'h ha penaos e vefe aozet ar programmoù, met hervezañ e lefe ar gant-se bezañ "un outil très souple permettant des décrochages locaux". Plas ar yezhoù bihan enni ? Ger ebet war an tem-se evel-just. Marteze avat e vije poent lakaat hon politikerien e-barzh ar jeu evit klask tennañ un dra bennak evidomp. Pezh'zo sur, ma ne vez ket goullennet, ne vo kinniget tra ebet ganto. Maz eus lod ac'hanoc'h dedennet gant an tem-se, grit kinnigoù mar plij (5 str Broseollet, 29200 Brest, pg. 98 46 40 98, plr. 98 80 53 31).

Festival Douarn' adarre ...


Kinniget 'm eus e vefe gouestlet ar festival da zont da minorelezhioù Bro-Frañs. Klouar-kenañ ar respontoù a-berzh aozourien kouz hag emsaverien ... (suezhet-bras n'on ket bet) ... Koulskoude e pourveze un darvoud e-giz-se un doare "lorom" etre minorelezhioù ar c'hwec'hogn", mod-se e vefe gwelet ar pezh vez graet lec'h all hag e vefe moaien a-benn ar fin krouiñ un doare frammp padus. Anat eo, unanet e vefemp krefvoc'h ... ■

Kristian Ar Bras

Stourm ar gurded

KLEÑVED AN DOURISTELEZH E TURKIA AR RETER

Abae «brezel ar pleg-mor» e oa dister-kenañ niver an douristed e Turkia ar Reter, ha disteroch c'hoazh eo bremañ abaeo m'eo adkroget an tagadennoù etre ar PKK (strollad labourerien Kurdistan) hag ar Stad turk e miz Mae 1993. Lamet eus o listennoù-kinnig pep beaj da Durkia gant tiez-beajñ broioù Alamagn, Spagn, Suis. Lazhet ez eus bet kantadoù a dud e korf an tri miz diwezhañ e Turkia a-bezh, diwar bombezennoù, tangwalloù ha kannoù.



E fin miz Gouere ez eus bet skrapet c'hwec'h tourist e Van, lost da harzoù Iran hag Irak, gant rebelled kurd a c'halv da voikoliñ an douristelezh en o bro (s.o. Bremañ miz Eost). Harzet ar c'harr-boutin diwezhañ d'an abardaez ha miret pevar den gall 60 vloaz. Kontet o deus ar re-se d'ar gazetennieren pa oant bet dieubet pemzektez war-lerc'h, penaos e oa bet ret dezho kerzhout kalz er menezioù 2000m da noz ha chom kuzh -da gousket- d'an deiz. N'int ket bet gwallgaset, met aon bras o deus bet evel-just. Pa ne oa netra all d'ober nemet gorzoc' er goudor e teskent "Breudeur Jakez" d'ar vugale !

Roet o deus ar Gurded da c'houzout abaeo e vefe sizhun diwezhañ miz Eost ur sizhun a stourm bras.

Fromadennoù an Douristed

E miz Eost em eus gwelst kirri-arsailh o tremen ingal war hentoù su Kurdistan, dreist-holl etre stêrioù bras a vrud etrevroadel an Tigr hag an

Euftrat, ha klevet cholori kirri-nij brezel en oabl. E Van, war vord al lenn vras, e ranke ar strollad touristed "Nouvelles Frontières" reiñ keloù bemdez da gannadur Bro-C'hall e Istanbul. Goulo e oa an ostelioù, rediet ar varchadourien da zigreskiñ kalz prizioù o zapisoù hag o mantill-lêr er stalioù karavan, war hentoù ar seiz, pezh ne oa ket dispiljus tamm ebet evit an ergerzher dispont -pe diveiz l- a chome du-se.

Dispar eo maezioù ha menezioù Kurdistan. Eno e vez, e-giz er broioù all, pinvidien ha peorien- an eil re o vezañ kalz niverusoc'h eget ar re gentañ- marc' hegerien ampart ar menezioù, ken bras ha moan ha brav ha paour hag o c'hezeg, o tañsal en noz dañsoù a-chadennoù un tammig e-giz hon re e Breizh ; kantreerien an uhel-blaennnoù o treuzvevañ dindan teltennoù, oc'h heuliañ o bagadoù kivi ha deñved hir ha liesliv o blev ; kêriadenniz o sevel tier douar ; tatum ha sechiñ e-pad an hariv beuzel o loened a-benn em dommañ er goañv. Kêriz pinvidik-mor

a-wechoù : e Diyarbakir omp bet gwarezet gant "paeron" kurd ar gêr, tre 'giz mod Sikilia ; pa teu ar estrañjour e rank e welout diouzhtu, ma ne fell ket dezhañ bezañ trubuilhet.



Ha dazont an Durked ?

Disheñvel eo relijion, yezh, sevenadur ar Gurded ouzh reoù an Durked. Diaes a-walc'h eo bet komz ganto. N'eus nemet ar studieren evit kaozeal un nebeut saozneg. Santet e vez diouzhtu int kar-o bro, tud lorc'hus ha c'hwerv : goulenet ez eus bet ganin perak e oa daouet d'o weladennin an ltron Mitterrand ma ne felle ket d'ar stad c'hall sikour anezho.

Plijet e oant o c'houzout e vev nann-gallaoued e Frañs ivez. N'ouzer ket petra 'vo disoc'h stourm Kurded broioù Turkia, Irak, Iran, Siria, evit an dizalc'h. Skrijus a-walc'h eo soñjal n'eus nemet an Armenianed o reiñ dorn dezho, dre guzh, bremañ ...

Anna-Vari Ar Gallec

BAOTED ALOUBUS FLORIDA



Baotig vihan a deuo bras, bras-tre zoken: Diwallit p'ha frenot.

A-boan brasoc'h eget ur spilhenn e koust ur vaot a Florida kazi netra hag e plij d'ar vugale. Gwerzhnet dre viladoù e Breizh e krogont da sevel kudennoù bras.

■ Iri dlozh gwerenn al lestr e ra
■ reuz ar c'hrouadur, e vlej betek
■ ma plego e vamm pe e dad. A
■ ginn ar fin n'eo ket kalz tra 25l, hag
■ vaot ken bihan ne gamer ket
■ ment a blas hag ur c'hazh pe ur
■ zhi ! Ar werzhour a dap unan eus al
■ denedigoù berniet en un dakenn
■ dour lor e-strad ar voest gant e
■ rouedig. Astenn a ra ur sachig hag ur
■ voestig gant ur vezennig plastik.
■ Laouen ez a kuit ar c'hrouadur gant
■ o-vaotig vihan ... na chomo ket pell.
■ E gwirionez ez eo al loenedigoù-se
■ mennoù-baoted miret er yenijenn ha
■ degaset eus ar stadoù-unanet dre
■ garr-nij, marc'hadourezh evel kalz a
■ re all. Ne veneg ket atav ar
■ gwerzhour e taougemento ar vaot
■ bep tri miz. Sur a-walc'h e soñj
■ dezhañ ne leuiet ket d'ar oad gour
■ evel 90% eus he c'henseurted.
■ Padal, pa vez graet mat war he zro e
■ c'hell kaoz ur vent a ugent santimetr
■ hag ur mas a 2 g/kg pa vez daou
■ vloaz. Evel ar baoted all e kendalc'ho
■ da vrasaat (goustatoc'h, dre chañs)
■ a-hed he buhez, hag e kemero kalz
■ muioc'h a blas hag ur vaot-dour.

Seul vrasoc'h, seul uioc'h e ezhommoù

A oad gour he devez ezhomm baot Florida (Chysemys scripta Elegans) kalz a blas hag a aeramant. Ur voest 80 litrad, leugnet an drederenn anezhi gant dour dous hag e-barzh mein plat dezhi da "heoliañ" dindan gouloù ispisial a roto dezhi kalsiom evit he chrogeñ. Diouzh an deiz e lle an dour bezañ tomm (etre 26°C ha 25°C), klouaroc'h diouzh an noz (etre 20°C ha 25°C). Kikaerez eo hi, plijout a ra dezhi un tamm frouezh, met sot eo gant ar pesked, ar preñv, an tammou kig evit ar chas. Tro 2000 lur e koust staliañ he annez. Ret eo ouzhpennañ ober war-dro al lestr ha ... kudenn ar vakañsoù. Ne c'heller ket kas ar vaot gant he stal ! Goude bezañ klasket en aner he reiñ d'ur park loened pe d'ur mirdi loened (beuzet abaeo pell !), e laosk lod o baot war-vord ur stank e lec'h ma kendalc'ho-hi da vevañ. Gwashoc'h : kreñv evel m'emaint e febront boued baoted ar vro, en arvar da vont da goll.

Savet en un doare stank e "atantou" Mississippi e c'hell ouzhpenn mennoù-baoted Florida reiñ ar salmonella (a zegas terzhenn ha foerell) dreist-holl d'ar vugale ne walc'hont ket o zaouarn goude bezañ o zouchet. N'eo ket dre zegouezh mag eo difennet o gwerzhnet er Stadoù Unanet abaeo pell !

Gwenael Karadeg, hervez "Femme Actuelle"

EVIT AR BREZHONEG
EVIT AD BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG

Kazetenn evit deskiñ brezhoneg
B. P. 41 - 29870 Lanniliz
6 niverenn : 75 lur



Geriadur HUDUR

Emañ o paouez klask prenañ ur geriadur brezhoneg-gallek nevez embannet gant Mouladurioù Hor Yezh. Gwelet em boa anezhañ da werzhañ e stalioù zo (stal Breizh e Roazhon, da skouer), met n'em boa ket gallet prenañ anezhañ d'ar poent-se. Aet on d'ar "Maison de la Presse" e Sarzhav o c'houzout ez eus aze atav un dibab founnuz a-walc'h a levrioù breizhek, levrioù evit deskiñ ar brezhoneg en o-zouez. Teir skouerenn eus geriadur Seité a oa aze da werzhañ e derou an hañv da skouer ha gwerzhet daou anezho. Souezhet bras on bet o welout ne oa ket tu din da gavout geriadur Mouladurioù Hor Yezh e-touesk al levrioù brezhonek all e dibenn miz Eost. Aet on da c'houlenn ar geriadur digant an itron a zalc'h ar stal.

Keloù zo e vo embannet a-raok dibenn ar bloavezh "geriahudur" Martial Menard. Er geriadur divyezhek-se e vo kavet ar gerioù a dalv d'ober anv eus an "traoù druz", pe "traoù ar reor" mar kavit gwel, e brezhoneg. Abaoe bloavezhioù emañ an aozer o tastum geriennoù pe

troiennoù a denn d'an danvez-se ken er yezh komzet ken er yezh skrivet, evel m'en deus displeget d'ar gelaouenn c'hall "L'Évènement du Jeudi", a voe embannet ganti pennadoù fonnus diwar-benn ar "gerioù gros", en un niverenn eus miz Eost ■



Plijus eo deskiñ BREZHONEG...

*"Aze emañ, gwelout a ran anezho ach'an" a respontas an itron din.
"Ya, gouzout a ouzon, met an hini a zo o paouez dont er-maez eo am eus c'hoant kaout" a respontis.
"O! n'ouzon ket hiroc'h war-se. Pep tra 'zo amañ" a glozas an itron.
Me a c'houlennas ouzhpenn, un tamm hegaset : " Ne zev ket ur paotr eus ar Coop Breizh da ginnig deoc'h al levrioù nevez?"*

Hi da respont war un ton didouellet : *"Eo! Gant Coop Breizh eo e labouromp, met c'hwï oar, ne vo ket adwelet ar beajour kenwerzh a-raok... miz Kerzu ! pe zoken miz Mezheven ar bloaz a-zeu, c'hwï oar, ni a labour dreist-holl e-pad an hañv"* Ha me o vont kuit gant ar respont-se. Ar skol a grog an-dro e miz Gwengolo. Rei e vo d'ar skolidi mont da Wened (ober 25 km) gant ar spi e vez skignet al levrioù brezhonek e stalioù zo eus ar gër-mañ evit prenañ al levrioù o deus ezhomm. Arabat disorñjal ez eus 9000 den o chom e gourenez Rewiz hag ur c'hias divyezhek o tigenñ d'an distro-skol. Un embregerezh a zo graet evit gounit archant. Coop Breizh evel ar re all. Anaf eo e c'hellfent gounit kalz muioc'h diwar ar pezh em eus gwelet e Sarzhav. O c'hortoz, an embannerien levrioù brezhonek o deus mil boan da chom bev.

Philippe Lanoë

HEKLEV ! Kollet e ene gantañ

Un tammig zo dija e oa bet un tamm brav a chenchamant evitañ : ne oa ket dav glesbiañ e gein dezhañ evit lakaat anezhañ da begañ. Ur jestr brav pa veze graet gant ur mousig bihan ne oa ket ken brav ken pa veze graet gant ur c'hozh PDG kratavennet azezet brav a-dreñv e vure.

Met bremañ, gwashoc'h c'hoazh a galz, ne vo ket deiziadet ken. paour kaezh timbr ! Evel ma c'hell priajou Kemper bezañ fest deus ur mare ha deus ur vro e talvez an timbr muioc'h eget e briz hag ar servij roet. Na pet kentel istor ha geografiezh a c'heller ober gantañ ? Hag evit ar bruderezh 'ta... pet gwech eo bet implijet ar simbol-se gant an dud a-vicher ?

Ha Petra teuo an dastermerien da vezañ ? Hag an dastumadenn timbroù bet roet din gant ma mamm, aet abaoe gant ma breur evit echuiñ evit ar mare etre daouarn ma mab ? Da betra mont da zastum karreziou bihan pegus a zalc'ho d'o ment ha d'o liv, memes pa vin tad-kozh ? Beurk !

Ur blijadur nebeutoc'h evit hor bugale hag hor bugale vihan. Ne chomo ganto nemet dastum poentoù nul war boestoù "com-flakes" ha tabletennoù chokolad.

Kentañ salons tiesyezhek al levrioù evit ar vugale e Breizh
KEOPER, 11-12 a viz KERZU 1993

"Yezhoù ha personnelezh"

Emañ Kajerou "L'Avenir", a-gevret gant Akademiezh Etrebroadel Gwir ar Yezhoù, o paouez embann ul levr 220 a bajennadoù skrivet gant un loulad ispisialist war studi ar yezhoù anvet minorezhel pe an nebeutañ implijet.

Kinniget ha dediet eo an teskad-se d'ar c'helenner Guy Héraud a zo anavezet mat e oberennoù "L'Europe des Ethnies ha "Peuples et langues d'Europe". Holl geniabourerien al levr a zo ken digabestr ha Guy Héraud en o hentenn ha ken distag eus an doareoù soñjal o ren pe glasel a vach re alies ar preder e-lec'h e zuebiañ.

E gwerzhent 22000 Sant-Brieg. (Chekenn-vank pe bost 160 F, digoust ar c'has ha pakañ).

An embann levrioù e brezhoneg

War niverenn diwezhañ ar gelaouenn c'hallek "Ar Men" e c'haller lenn ur pennad hir, plijus ha skeudennaouet-kaer diwar-benn an embann levrioù brezhonek evit ar vugale. Ho allañ a reomp da lenn ar pennad-se ; ennañ e yeskot ur benn traoù diwar-benn bed al levrioù yezhonek. Ra vo kavet pennadoù all a-seurt-se war "Ar Men"!

"Précis d'histoire de Bretagne"

Istor Breizh berr-ha-berr, 32 pajennad, gant Iwan ar MENGA, 15 lur ar skouerenn (10 lur remelken dre zek). Mat eo evit an deraoudi war zavez Breizh. Y. Talbot, presbital, 22110 Rostren.

"Koad Maloen : abati sistersiat"

Testenn an tad Dom Aleks Pressé, abad Tamié, lakaet e brezhoneg gant Job Lecl'hoven. 32 pajennad, hag ar skid orin e galleg ouzhpenn. 30 lur ar skouerenn. Goulennit digant Job Lecl'hoven, embannadurioù an Tour Tan, 22110 Kergist Moelou.

"Ur bloavezh e Lannuon"

Deizlovr Youenn Olier. Plijadur am eus bet o lenn an ervorenoù-se, pa oan-me, ur bugelig 9 vloaz, o chom e Lannuon ivez d'ar c'houiz-se. Soñj am eus mat eus al lec'hioù hag an dud deskrivet gant Youenn Olier. Embannet gant Imbourch.

Y. Talbot

Gorbl a nel

Gant Kouiliz KEDEZ, embannet gant Mouladurioù hor yezh, dastumad Skrid. "Pareet eo an aelez gant c'hwiez ar buhezennou" en deus an Oberour Kedezh lakaet war riblenn e levr : dour-rous ar skrivagner, bet savet ar c'han barzhoneg bennak-mañ gantañ, pe hini al lennerien, pe ar fideled kentoc'h, kaset-digaset eus «Berehit» da «Dasor'h Eva», hag eus «Bro Ach» pe «Kér-Is» da «Tremenadeged ar Sav-Heol», war lon «Son Marjañg ar Ribot kozh»...

Strobinellus a-walc'h skridoù an otroù Kedezh, prederiet bras ma'z eo gant Satanas, Doue, merched hag ar reiz, e-giz an holl, petra ! Ha personel a-walc'h oberennoù ar barz, merzet e vo gant an nep a raio ouzhpenn sankañ e fri el levr : en em staliañ eo ret ober evit lakañ barzhonegoù en o saourusañ. Setu un larva eta :

TORRLEZENNOUR

"Ned eo ket yezh an p'ndez" a zigelas a-zaganñ an brezhoneger.
"Troch, elpenn, distruj eo al lavar barzh" a laoskas an aozer.
"Ned eo ket ho p'roukad diouz reolennoù ar yezhadur" a zroenne an diskrad diavaeziat.
"An dorlezenn henstuzet eo mamm ar parour, diazezenn war siwink ar gwedour" a zrozas ar skrivagner. Hag an ur guzuikec e biskienas c'hoazh. "Kluj Doue eo."
150 pajenn, ISBN 2 96863 063 9

Brezhoneg Galleg - Français Breton - Geriadur divyezhek

Unan ouzhpenn, a soñjalod. Gwir eo ez eus kalz a c'heriadurioù divyezhek galleg/brezhoneg ha nebeutoc'h brezhoneg/galleg. Hemañ avañ n'eo ket unan ouzhpenn, met unan talvoudus ouzhpenn. Bez' emañ ennañ ar c'heriaoueg dibabet hag urzhiet gant Roparz Hemon evit ar "Brezhoneg Eeun" ha "Gerioù diazez ar brezhoneg" gant Fransez Kervella. Ouzhpennet o deus aozerien an oberenn geriaoueg al levrioù deskiñ brezhoneg ha gerioù implijet ar vugale a-vevrañ. En holl, 5000 ger brezhonek gant o zroidigezh ha 6000 galleg gant o zroidigezh. Un tamm yezhadur zo ennañ ivez, displeget sklaer gant kalz a skouerioù. Ennañ ivez distagadur pep ger hervez ar Lizherenneg Fonelek Etrebroadel (IPA). Kaset eo bet da benn gant Iwan Kadored, Yann Desbordes ha Divi Kervella. Ur geriadur divyezhek chakod aes da implij ha talvoudus evit an holl.

Brezhoneg galleg - Français breton - Geriadur divyezhek, Mouladurioù hor yezh, 56 lur, 1 pl. Peguy 29260 Lesnevén.

Gw. K.

BRUDEREZH

Ul levr nevez d'ober skol vrezhoneg

Eus al levrig... Bloaz zo e Gouel ar Brezhoneg e oa bet kinniget al levrig "Ni a gomz brezhoneg", anezhañ un teskad 50 diviz berr, gant ar c'heriaoueg brezhoneg-gallek da heul, a da renket e-barzh 27 kentel. Ur benveg e oa da gelenn d'ar grennarded el liseoù ha d'an dud vras a grog gant ar yezh er skolioù-noz pe er skolioù "Sadorn-ha sul".

Er c'hasedig da vont da heul (26 munutenn) e oa sonerollet 42 eus an divizoù-se.

Gant Mark Kerrain, kelenner brezhoneg e Roazhon, e oa bet savet an dafar-kelenn-mañ evit e studierien el lise hag e kentelioù-noz ar gevredigezh Sav-Heol.

...d'al levr

Un tamm mat eo bet kresket adembannadur 1993 peogwir ez eus bremañ 64 diviz renket e-barzh 36 kentel. 130 pajennad en holl.

Notennoù berr war an distagadur e-barzh pep kentel, goude ar gerioù nevez. Al lodenn yezhadur, peuzhevel ouzh ar pezh a gaver el levrioù-kelenn all, a gaver poelladennoù a-leizh d'he heul, darn anezho hir-mat zoken.

Dre vras e klot al live gant "Brezhoneg Buan hag Aes" Per Denez, war-bouez kement-mañ bepred :

- ber e vez an divizoù peurluviañ
- n'eo ket bet savet ar c'hentelioù gant un diviz hepken, meur a hini a vez alies, hervez danvez ar gentel ;
- ne vez nemet ur poent yezhadur bras peurluviañ e pep kentel ;
- n'eus ket a gentel diwar-benn an doare-divizout, a vo laket en embannadurioù da-zont.


Er c'hasedig avañ n'eus bepred nemet 42 diviz evel en embannadur 1992, met spi zo da sonerolloù an holl re all goude an hañv.

Evel geriaouegoù bizskrivet Eil Derez Diwan eo kinniget al levr "Ni a gomz brezoneg", p'emañ a-vent ganto (stumm A4 pleget) ha keh tev. Pa vo kavet un embanner e c'hallo dont da vezañ ur gwir levr.

Da c'hortoz emañ e gwerzh gant an oberour : 100 lur al levr hag ar c'hasedig, 80 lur al levr hepken digant Mark Kerrain, 42 Straed al lizeu, 35 136 Sant Jakez al Lann.

GERIOU-KROAZIG

sant Mich BEYER
Gael niv. 8



A-serzh hag a-led :

1. Mein pe vioù.
2. Kre Amerika.
3. Urzh da zigeriñ ar beg.
4. Bezann dic'hoùr.
5. Tammoù a rae.

Diskoulmoù gael niverenn 7 :

- A-led :**
I. SPD ; kimiad ; dar ; ke ; ke ; et.
II. Trezeni ; erien ; le ; pra. III. Resed ;
roev ; avelis. IV. Ispreled ; morgant.
V. Dinask ; roueod. VI. Kado ; edr ;
paramantour. VII. El ; karantez ; le.
VIII. Loa ; derede ; kere.
IX. Luskellerez ; kensonel. X. Kur ;
soner ; kanol. XI. Kren ; pe ; unnek ;
govel. XII. Ao ; diraez ; nb ; gwrez.
XVIII. Turumellek ; oglenn ; oa.
XIV. Zo ; anaf ; ebu ; as ; eeun.
XV. Usmen ; aner ; sperneg.
XVI. Aozo ; evelse ; ene ; do.
XVII. Speur ; studi ; nadozioù.
XVIII. Teg ; inar ; skoer ; mui.
XIX. Araokadenn ; Sezni.
XX. Ranelle ; ael ; tenner.

- A-serzh :**
1. Strinkellikat ; mastar. 2. Pres ;
afoù ; rouz ; opera. 3. Desped ; aske ;
rouzezan. 4. Zer ; ok ; kundu ; sou ;
oe. 5. Keded ; arer ; imam ; riki. 6. In ;
fier ; prenet ; nal. 7. Miendall ; ealañ ;
Sade. 8. Darn ; es ; elf ; etre. 9. Aer ;
rouze ; avu ; na. 10. Droukpedenn ;
kened ; ne. 11. le ; azezenn ; belli.
12. Dent ; rebours ; SS. 13. Anv ;
ralek ; enket. 14. Momeder ; glas ;
aoze. 15. Laoua ; en ; gwespedenn.
16. Kevrenn ; skorn ; enoriñ.
17. Eget ; koaveneraz.
18. Pladorenneraz ; en ; imor.
19. Erin ; real ; ouedou.
20. Tastornell ; rangouilh.

**Kan
PLADENNOU NEVEZ**

Ar miz-mañ e kinnigan deoc'h div bladenn nevez deuet er-maez, pe nevez a-walc'h atav. Pladennoù argant int, o div. N'eus ket a sonerezh warno, n'eus ket a vinvioù sonerezh pa lavarint mat. Mouezhioù tra ken, mouezhioù dreist me' lavar deoc'h.



Ar Vreudeur MORVAN

A-benn ar fin ur bladenn argant gant ar Baotred MORVAN. E-touez kanerien wellañ Breizh int, an holl o vezañ a-unan war ar poent-se. N'int ket chalet gant ar brud, gant an argant, kanañ a reont evit o filjadur ha dreist-holl evit hon plijadur ni. N'haller ket chom azezet p'o c'hlever, pegen a ra ennoc'h ar c'hoant dañsal kerkent. Daou heuliad ay a d'ober ar bladenn : unan plinn hag unan fiseal. Kavet e vo enno komzoù Melig. An ti bihan war lein ar menez ... Komzoù anavezet a-bell, met pa vezont distaget evel-se, un teuzar. 35'22 a biljadur, ha bec'h d'an dañs ! Un dra, memestra, gwelloc'h e vefe bet lakaat ar c'homzoù skrivet, nag ur skoazell evit ar re a zo o teskiñ Brezhoneg pe o teskiñ kanañ ■

Ar Vreudeur Morvan - RKB - Coop Breizh 1993.

Kanerien Pleuigner - Bro Gwened. Gant ar bladenn-mañ eo bet lakaet ar c'homzoù skrivet. Doare skrivañ gwezhall Brezhoneg Bro Wened zo bet implijet aze(*). An droidigezh c'hallek, hi, zo bet skrivet gant doare skrivañ ar galleg a-vremañ. Daou seurt kanennoù zo war ar bladenn. Da gentañ, kanennoù melkonius, kanet goustad. Da c'houde, plas d'an dañs : laridenn, hanter-dro. An holl ganennoù a deu brav gant paotred Pleuigner, kanet just, distaget sklaer, unan o kanañ, ar pevarzek all o tiskanañ e doare Bro Wened. Ul live uhel o deus tizhet aze, santet e vez zo kalz a labour a-dreñv ■

Kanerien Pleuigner - Coop Breizh.
* sañven (saven), de valé (da vale), plañig (plac'hig), hoah (c'hoazh)
Gw. K.

**ROCK 'N RUZ
Bloaz 'zo eo ganet Red Cardell**

Goude bezañ bet o c'hoari e-pad tri bloavezh gant Pentleps, o deus divizet Yann-Ber RIOU ha Jean-Michel MOAL sevel «Red Cardell», ur strollad rock 'n roll war un hent keltiek.



an PROERER, tabouliner, ha Patrick BOYAT, war gitar-boud, a sono premañ da heul akordeoñs Jean-Michel (bet gwezhall ivez gant Yann-Ber, paotr Lokireg deuet da chom e Menez-Are. Met ma plij dezho mont d'ar festoù-noz, n'int ket gouest da seniñ dañsoù giz gwechall. «Kas-a-barh», a zo un ton eus a Vro-Wened, met cheñchet ar ritm anezhañ, ha mesket eo aze akordeoñs Jean-Michel gant son bout ar gitar, doare «heavy metal», kanet e saozneg gant Yann-Ber. E brezhoneg eo kanet «An Hunvre»,

ur seurt gavolenn a vije bet c'hoariet gant sonerien tango !
«Ch'wi'lar bugale vez o kreskiñ
War tu fall an hunvre
Lech ma teu an hurlink da wir
E-giz-se mañ an traoù !»
«Start 'vo ar jeu evit bugale ar bloavezhioù da zont, diaes ar bed abalamour deomp-ni, ar re vras !»
eme Yann-Ber.
Da c'hortoz e c'hellomp holl asambles selaou «Rouge» gant Red Cardell (Arcade 302 083), bet enrollet e studio Square e Brussels, war-lerc'h 70 abadenn war Frañs a-bezh ■
Sten Charbonneau

TAOLENN

BREMAÑ niv. 144
miz Gwengolo 1993 - 20 pajenn

Kemennadennoù	2
Bag Diwan	3
Berr ha berr e Breizh	4-5
Karta Europa	6-7-8
Keltia	8-9
Etrevroadel	10-11-12
Gouel sinema Douarnenez ...	13
Stourm ar Gurded	14
Baoted aloubus	15
Embannadurioù nevez ...	16-17
Sonerezh ha kan	18-19
Emvod ar Gelled	20

Pennadoù gant AVC - Olier ar Mogn, Iwan Kadored, Herve Kerrain, Herve Bihan, Paskal Belz, Bernez Kadored, Y. Varch Thorel, Lena Louarn, Kristian ar Bras, Anna-Vari ar Gellig, Gwenael Karadeg, Philippe Lanoë, Y.F.J., Hegareg, Yann Talbot, Mich Beyer, Sten Charbonneau.

Skoazell diflazañ gant Olier ar Mogn, Doming Jolivet, Andreu Roparz, Iwan Kadored.

Luchskudennoù gant K. an Duigoù, Lena Louarn, I. Kadored, Enbata, F. Actuelle, Louis Blonce, Cloarec, AVAG.

Tressadenn gant Nono, Wolinski.

Renerez BREMAÑ : Lena Louarn

Skrivet e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù, gant skeudennoù, dreist-holl ! war baper, pe gwelloc'h pladennig a-raok ar 24 a viz Gwengolo !

Trugarez deoc'h.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ,
8 ru Hoche,
35000 Roazhon, BREIZH

Niverenn CPPAP 62974

Skrivañ da **AL LIAMM**
16 straed des Fours à Chaux
35400 - SANT MALO -

**Lennit
al liamm**

Koumanant bloaz 150 lur (studieren, tud dilabour 100 lur)

Brasañ gouel en Europa EMVOD AR GELTED

Darempredet stank eo bet gouel etrekeltiek an Oriant ar bloaz-mañ. Ur c'hresk a 20% a dud e salioù Kervac'hig, Kozhmao pe er Palez. N'eo ket souezhus pa vez ken brudet Gouel an Oriant bremañ dre holl vroioù Europa. Ha laouen eo bet * Italianiz, Belgiz hag Alamaned gant roll ar meuzioù : an teuzar !



Leun-chouk e oa ar gêriadenn geltiek bep noz. Start e oa kavout ul lec'h da deurel e bouez.

Loreena Mc KENNIT, kanerez ar C'hanada, o kinnig «New age music» awenet gant an hengoun keltiek, Alan STIVELL, telennour Langoned hag e holl sonioù anavetañ, koulz ha GWERZ pe BARZAZ gant o anaoudegezh don eus gwir muzik Breizh, a zo deuet a-benn da fromañ ha da entanañ salioù leun-chouk. Berzh o deus graet kement ha kement Skosiz «RUA» pe «Old Blind Dogs», nebeutoc'h anavezet c'hoazh koulskoude.

Ma oa niverus c'hoazh arvesterien «Anne des Isles», bet savet gant Herve CAVELIER, un abadenn bet klevet warlene evit ar wech kentañ, n'int ket bet ken stank evit BAGADAPACK, savet gant Marc STECKAR, soner tuba an Havr nevez, ur grouidigezh souezhus, lec'h m'o deus bet tro Jean-Louis VALLEGANT, Jean-Yves MOIGN, pe Bernard PICHARD da lakaat ar vombard e-touez binviñ da zont ar jazz e Breizh.

Rock, blues, ha tan-arvest, biniou, gaïta ha pib-ilin a oa ivez war roll ar gouel, peadra da danvañ ... pe da lonkañ betek re ! Evit heuliañ an holl abadennoù-se, war-bouez un nebeud re, tost da 200 kasetenner bennak, eus Breizh, Europa, pe ar Stadoù Unanet. En o zouez, ur vandennad eus Radio-France Armorique pe Radio Breizh Izel, evel-just ! (ha klevet ho peus ?). Ken ar bloaz a zeu en oriant evit brasañ gouel Europa.

Sten Charbonneau



Evit ar wech kentañ ar bloaz-mañ e veze liammet holl arzourien hag aozerien ar gouel gant ur gelaouenn bemdeziek ha liesyezhek, ha setu ma veze embannet (ha lennet ...) pennadoù e brezhoneg bemdez gant tud an Oriant e-pad dek devezh. Trugarez d'ar Prezidant GERGADIG, ha d'e skipailh, o doa lakaet panelloù-henchañ ar gouel e brezhoneg ivez, evit ar wech kentañ. Brav, paotred, ha kit war-raok e-giz-se Hegareg

Digoradur diskouezadeg Skoazell Vreizh e gouel an Oriant. A-gleiz da zehou : Denez RIOU (Emgann), Armand GUILLEMOT (eil-maer an Oriant) ha Jakez AN TOUZ (kuzulier-kêr karget eus sevenadur Breizh)